

8N2-4-044

A LA GLOIRE DE SAINT POL

PATRON DU LÉON

# CANTIQUES

Bretons & Français



Brest. Imp. 4. rue du Château

# KANTIK SANT PAOL

KENTA ESKOP LEON.

---

Ton : *Breuztez ar Fetz.*

1.

Savomp hor mouez, kristenien,  
Da veuli an Dreindet ;  
Ni oa enn denvalijen  
Hag e fang ar pec'het ;  
Doue en deuz digaset  
D'e-omp he abostol,  
Meulomp, meulomp an Dreindet,  
Trugarekaomp sant Paol !

DISKAN

Sant Paol, patron benniget  
Hor bro gaer a Leon,  
Ni fell deomp oll ho karet,  
Kennerzit hor c'halon.  
Enn hon touez ho relegou  
Zo hor brasa tenzor :  
Evel guechall hon tadou,  
Ni rento d'eo enor.

2.

Sant Paol a oa daoulinet  
E palez a Vro-Zaoz,  
Enn-dro d'ezhan astennet  
Mantel denval an noz,

Pa oue souden strafuillet  
 Dre eur har sklerijen,  
 Ha dirazhan o velet  
 Eun eal enn he gichen.

## 3

« Paol, emrezhan, den Doue,  
 » Sao buhan ac'halen,  
 » Dleour out ouzpen d'ar Roue  
 » Euz ar guir sklerijen ;  
 » Ma c'hanavez ar vro-ma,  
 » Dre-z-out ar Dreindet Sakr,  
 » Satan a ren enn Eussa,  
 » 'Vel eun tyrant fallakr.

## 4

» Larkoc'h c'hoaz var bord ar mor  
 » Hag e kreiz ar c'hoajou,  
 » Dreist-oll e kear Oksismor,  
 » Eo ruz he aoteriou ;  
 » Ruz gant ar goad innosant  
 » A vugale vian  
 » Sakriflet d'an tyrant  
 » Var an taoliou-mean.

## 5

» Dont a ran aberz Dote  
 » Truezuz ouz an oll,  
 » A fell d'ezhan er vro-ze  
 » Kas he zervicher Paol ;  
 » An ad zo dija skignet  
 » Gant eur gouarnour mad ;  
 » An douar zo labouret,  
 » Puill e vo an eostad.

## 6

» Distag eta da galon  
 » Euz tud ha douar Saoz !  
 » Eul lestr, o vont da Leon,  
 » Zo du-hont e c'hortoz.  
 » Epad ma treuzi ar mor,  
 » Me vo gan-e-hoc'h stutier,  
 » Hag ho kaso da Arvor,  
 » Enn despet d'he reier. »

## 7

Sant Paol, sentuz 'vel bepred,  
 A glask he veleien.  
 Kerkent enn aod e tired  
 Ar bobl leun a anken ;  
 Enn eur velet o pellaat  
 Ho abostol karet,  
 An dour enn ho daoulagad,  
 An treaz a zo glepiet.

## 8

Ha piou a c'hellfe koumpren  
 Peger braz rann-galoun,  
 Pa zavaz a-zioc'h ho fenn  
 He venediksion !  
 Piou a hellfe lavaret  
 Ar c'hri, ar c'heuz dispar,  
 Pa ne helljont ken guelel  
 Al lestr euz an douar !

## 9

Prest e c'herru enn Eussa ;  
 Prest ez eo diskaret  
 An taoliou-mean er vro-ma,  
 gant goad an den ruziet.

Bep pas d'ar zant zo merket  
Enn-hi dre viraklou ;  
'Plas an daol-mean distrujet,  
E saver ilizou.

10

Ha Paol dilezél Eussa,  
'Vit dont da Enez-Vaz.  
Arthur, roue ar vro-ma,  
Hen reseo, laouen braz ;  
A ro d'ezhan he balez,  
Ebarz an Enezen,  
'Vit servichout da james  
D'ezhan, d'he veleien.

11

Ha neuze bennoz Doue  
A goezaz var ar vro ;  
Satan a ioa Roue  
Mont a reaz enn he dro.  
Assamblez gant ar sar pant,  
Horrol an Enezen,  
En em strinkaz an tyrant  
'Bars ar mor, var he benn.

12

Ha neuze ne glevet ken  
Kriaden estlamuz  
Eur vam o krial he anken  
Enn dro d'an daol-mean ruz.  
An ekleo ne respont mui  
Enn noz 'barz ar c'hoajou,  
Nemet d'ar vouez o veuli  
Ebarz an ilizou.

13

Ar yugale dasprenet,  
Dre zour ar Vadichant,  
Ne zantint ken o redet  
Ho goad ken innosant.  
Jesus, hor guir Redemptor  
Evit-ho sakrifis,  
A zo he gostez digor  
Var aoter an Ilis.

14

Neuze kroaz Hor Zalver,  
Savet huel enn er,  
Euz hor bro, 'vit pell amzer,  
A gasaz Lucifer.  
Breman, e klask dont c'hoaz  
Da ren var Breiz-Izel ;  
Mes ni zalc'h stard d'ar groaz ;  
Gan-e-omp guelloc'h mervel !

15

C'hui, hor Patron benniget,  
Diuallit ac'hanomp ;  
Er iec'hed hag er c'hlenved,  
Ouz-hoc'h en em bedomp.  
Keit ha ma vezo reier  
Var bord aochou Leon,  
Grit ma vo nerzuz, tener,  
Ar feiz enn hor c'halon !



# SANT PAOL BENNIGET

TON : *Les Breiz.*

1

Sant Paol benniget, hon tad, hor patron,  
Ni 'zeu davedoc'h, hag a greiz kalon.

2

Ni zeu davedoc'h, patron gallouduz,  
Ni zeu davedoc'h, tad karantezuz.

3

C'houi o peuz desket d'hon tadou guechall  
Anaout an hent mad, anaout an hent fall.

4

Euz hent an ifern, c'houi ho dioualle ;  
Varzu an envou c'houi eo ho bleine.

5

D'ar pez o peuz great evit non tud koz  
Ni ho bugale a gan mil bennoz.

6

Mar domp kristenien, bugale Doue,  
Bennoz da Jezuz, bennoz deoc'h ive.

7

Ne zijonjimp ket euz seurt madelez,  
Ne zijonjimp ket euz seurt karantez.

8

C'houi peuz en hon touez, en hano Doue,  
Hadet an ad mad, bara an ene.

9

C'houi peuz en hon touez, ni bugale Vreiz,  
C'houi peuz en hor c'hreiz plantet doun ar  
[feiz.

10

An had 'peuz hadet a zo diouanet,  
En eun douar mad ho had 'zo kouezet.

11

Brudet e pep leac'h, kristenien bro Leon,  
Ni za gant hon hent, dinec'h ha dizaon.

12

Mar zeu beac'h varnomp, ni ne blegomp ket,  
Ni zo bretonet ha pennou kalet.

13

D'ar Pab, d'hon Eskob ha d'hor Beleien  
Ni a zalc'h bepret, hirio, da viken.

14

Ni oar eo gantho e ma ar vuez,  
Gantho 'ma an hent hag ar virionez.

15

O senti outho, ni a oar eun deiz  
Or bezo en Env kurunen ar feiz ;

16

Kurunen ar feiz, joa, peoc'h ha dudl,  
E kichen Jezuz, e kichen Mari.

17

E kichen Sant Paol, etouez hon tud koz,  
'Zo he girunen 'barz ar baradoz.



## KANTIK RELEGOU SANT PAOL

TON : *Bale Arzur.*

DISKAN

Da zant Paol hor guerziou kaera,  
Hon toniou an dudiussa,  
Da zant Paol eur c'hantik a joa.

1

Hirio e ma evit bro Leon  
Deiz ar vennoz, deiz ar pardon,  
Bennoz, pardon, feiz peb kalon.

2

Hirio e ma gouel relegou,  
Relegou Sant Paol hon Aotrou,  
Eur gouel evel 'z'euz en Envou.

3

Goude Doue, Sant Paol 'n'hon touez,  
Sant Paol a zo bet an alc'houez,  
'N'euz digoret ar guir vuez.

4

He genteliou, he vuzudou,  
A c'houneze ar c'halonou,  
Kalz muioc'h c'hoaz he vertuziou.

5

Kurunet eo er Baradoz ;  
Enho e ma ouz hon gortoz,  
O pedi 'vidomp deiz ha noz.

6

Ar zent ne reont morse dilez ;  
Hor c'haret 'reont hed ho buez ;  
Ar maro 'gresk ho c'harantez.

7

Euz an env, an Aotrou Doue  
A vinnig ar garantez-se,  
Emgleo etre he vugale.

8

Ni zo aman var an dachen ;  
Sant Paol, c'houi zo en he gichen ;  
Deomp ar brezel, deoc'h ar beden.

9

Ho kloc'hik a glevan aze  
O son : karit, karit Doue ;  
Outhan hon tadou a zente.

10

Ho stol guechall eo a naskaz  
An drouk-speret en Enez-Vaz ;  
Ho stol hirio hen nasko c'hoaz.

11

Ho preac'h a zeske d'hon tadou  
Ar guir hent a gas d'an Envou ;  
Setu aze he relegou.

12

Me vel ho piz a vinnige,  
Dre oll vro Leon, ho pugale ;  
Ho piz hor binnigo ive.

13

Ho pen zantel 'jom en hon tonez ;  
Euz ar pen-ze 'klever eur vouez,  
Eur vouez nerzuz, a zougo frouez.

14

« Dalc'hit d'ho feiz, tud Breiz-Izel,  
» Houn-nez eo ho kuella skoazel  
» 'Vit mont d'ar vuez eternal. »

15

« Dalc'hit da heuill ho peleien ;  
» Hin o deuz, ar garg d'ho kelen ;  
» Gantho ne faziot biken. »

16

« Dalc'hit da zével bugale  
» A vo kristenien n'ho koude,  
» Guir zervicherien da Zoue. »

17

« Brezel spountuz a reer d'ho feiz ;  
 » Ra jommo bepred en ho kreiz  
 » Ar feiz-se, kaera tenzor Breiz. »

18

Prezeget em euz d'ho tadou,  
 Ho c'hasset em euz d'an Envou.  
 'Veld'ho dalc'hit mad d'am c'homzou.

19

Na joa ho kuelel em c'hichen,  
 Bep a gurunen var ho pen,  
 Kaeret ganeoc'h va c'hurunen !



# DA ZANT PAOL

## MEULEUDI HA PEDEN


ANDANTE.



Ka-nomp, ka-nomp a greiz ka-lon, Meu-leu-di



Sant Pol a Le-on, Ha gou-len-nomp, dre ar be-



den, Eus e ven-nos an a-lu-zen, Ha gou-len-



nomp, dre ar be-den, Eus he ven-nos an a-lu-zen.

2

Gant tudchentil huel savet,  
 Paol, e Bro-Zaós a zo ganet ;  
 Lagad Doue, gant he vennos,  
 A bare varnhan deiz ha noz.

3

E skôl Sant Eitut dizale  
 Paol a zesk mad'lezen Doue ;  
 Tremen a ra he iaouankis,  
 Oll da Jesus, oll d'an Ilis.



4

Hermit iaouank, beleg santel,  
Galvet da zont da Vreiz-Izel,  
Lezit ho pro, treuzit ar mor,  
Ha deuit brema varzu Arvor.

5

Kalon ar bobl a zo rannet,  
O klevet Paol o lavaret :  
Va bennos d'ec'h ! ha ken-a-vo,  
Er barados evit ato !

6

Gant enn neubeudig tud-Doue  
Var eul lestr skân e pign neuze ;  
Gant El ar mor al lestr henchet,  
Dirak Eüssa a zo kasset.

7

Disken e ra en enezen,  
Evit prezeg ar feiz kristen ;  
Gounit e ra dre nerz komzou  
D'ar guir Doue kals eneou.

8

Tud an enez 'zo glac'haret,  
Pa lavar Paol ez eo galvet  
Da vont larkoc'h e douar Breiz,  
Evit kass sklerijen ar feiz.

9

Dont e ra beteg Enez-Vaz,  
En eur ober burzudou bras ;  
Digemer mad hen deus eno  
Digant Witur, roue ar vro.

10

Kichen ar mor, en eun toul doun,  
E zeus eur sarpant bras-estoun,  
Hag a ra spount an enezen ;  
Rag drebet hen deuz meur a zen.

11

Hep aouñ ebet, setu ar Zant  
O vont da stourm ouz ar sarpant.  
Al loan a iud, an dud a grén ;  
E pep kalon e zeus anken !

12

Gant eur stôl zantel chadennet,  
Da heul ar Zant e rank kerzet.  
Tolet eo var he benn er mor braz.  
Oh ! pepeus joa en Enez-Vaz !

13

Anaoudek mad d'an den zantel,  
Witur 'ro dezan he gastel.  
Neuze Paol a dremen ar mor,  
'Vit dont da jomm da Oxismor.

14

Kear Oxismor zivar neuze  
Zo gounezet-oll da Zoue.  
Chenchet eo an hano dezhi,  
Ha Kastel-Paol e rer outhi.

15

Nag a draou kaer ha burzudus  
A ra Sant Paol abers Jesus !  
Ar mud a gomz, ann dall a vél,  
Ar pec'her paour a zeu santel !

## 16

El lenneier hag er c'hoajou  
Men-hir, dolmen ar fals doueou  
Dre nerz ar zant 'zo diskaret,  
Ha kroaz ar C'halvar 'zo savet.

## 17

Gant ar Roue ha gant ar bobl  
Goulnnet eo evit Eskob,  
Kenta Eskob a yro Leon :  
Oh ! nag a joa e pep kalon !

## 18

Goude buez hir ha santel,  
Pol 'zo brema e renk huel,  
E touez ar Zænt hag an Elez,  
Gant kurunen ar zantelez.

## 19

Kaer eo ar c'hleuziou alaouret,  
Kaer eo, an Tour-Dantelezet,  
Kaeroc'h eo c'hoas, Eskob santel,  
Ho C'hilis-Veur, e keâr Gastel !

## 20

O gouel dispar, gouel a enor,  
Gouel a vennos evit Arvor !  
Tridal a ra kalon an oll,  
En eur zevel varzu Sant Paol.

## 21

Euz bar an eny, o Sant Patron,  
Sellit gant joa ouz tud Leon,  
O kana deoc'h meuleudiou  
Gant ho c'halon hag ho moueziou.

## 22

Ho Relegou a zo brema  
Enn Arched-aour ar skedussa,  
Ha dirazo hiviziken  
Ni gasso deoc'h mouez hor peden.

## 23

Grit ma jommo griziu ar feiz  
Douñ e kalon kristenien Breiz,  
Evel griziu ar guez dero  
E kreiz kalon douar hor bro.

## 24

D'ar iaouankis roit furnez,  
D'ar vugale sentidigez,  
Ha d'ar gosni kalon nerzus,  
'Vit divoaska buez poanüs.

## 25

Gant alc'hoez aour ho pedennou  
Digorit deomp dor an envou,  
Ha ni 'gano deoc'h mill bennos  
E kreiz dudi ar Barados.



# CANTIQUE A SAINT POL

AIR : *O Marie, ô mère chérie.*

## REFRAIN

En ce jour de douce allégresse,  
Fiers Bretons, fiers chrétiens du pays de Léon,  
Redisons tous en chœur ce chant plein de ten-  
A Saint-Pôl, à notre Patron. [dresse.

1

Dès son jeune âge Dieu l'appelle,  
Avec David, Gildas, Samson,  
Il se range sous la tutelle  
D'Hiltut, le maître doux et bon.

2

Quelle suave et pure école,  
L'enfant apprenait chaque jour  
A lire la sainte parole,  
A connaître la loi d'amour.

3

Un jour le ciel par un prodige  
Montra la fleur de sainteté  
Qui grandissait, céleste tige,  
Dans l'ombre et la simplicité.

4

Une troupe d'oiseaux sauvages  
S'abat sur un champ de froment,  
Commet partout d'affreux ravages,  
Perd la moisson en un moment.

5

L'enfant vient : miracle admirable,  
Les oiseaux à sa voix soumis  
Se laissent mener à l'étable  
Comme de paisibles brebis.

6

Ainsi parfois les âmes pures  
Du ciel reçoivent le pouvoir  
De commander aux créatures,  
De les soumettre à leur vouloir.

7

Conduit par la divine grâce,  
Un jour Pôl aborda chez nous ;  
Dieu pour convertir notre race,  
L'avait formé, pur, fort et doux.

8

Ecoutez ; une cloche sonne,  
Est-ce un Ange qui vient là-bas ?  
Vers la plage où la mer moutonne,  
Accourons tous, portons nos pas !

9

Un Saint vient dans notre Bretagne,  
Béni soit l'Élu du Seigneur !  
La grâce de Dieu l'accompagne  
Sous l'étendard du Rédempteur !

10

Et, comme autrefois, les disciples,  
Il vient sans arme, il ne craint pas ;  
Soudain des prodiges multiples  
Germent sous chacun de ses pas.

11

Au bruit de sa petite cloche  
De tous côtés le peuple accourt,  
Et cette foule qui s'approche  
Entend la parole d'amour.

12

On délaisse l'autel antique  
Couvert de larmes et de sang,  
Et sur les dolmens d'Armorique  
Le Fils de Dieu même descend.

13

Mais le démon sur nos rivages,  
Soutien du culte des faux dieux,  
Faisait partout d'affreux ravages,  
Serpent ou dragon furieux.

14

Il parcourait la côte entière,  
Et l'on entendait tous les soirs  
Rôder la bête meurtrière  
Autour des champs et des manoirs.

15

Ni les vœux, ni la pénitence  
N'avaient pu dompter le dragon,  
Et l'on n'avait plus d'espérance,  
Qu'en Saint Pôl, notre doux Patron.

16

Il vint; aux plis de son étole,  
Enchaina le monstre dompté,  
Obéissant à sa parole  
Et soumis à sa volonté.

17

O Saint Pôl, dans nos jours de haine  
Le vieux dragon revient plus fort ;  
Pour que ta puissance l'enchaîne,  
Saint Pôl, nous te prions encor !

18

Nous venons, comme nos ancêtres,  
Chercher asile auprès de toi,  
Sous la houlette de nos prêtres,  
Sous l'étendard de notre foi !

Garde-nous, garde-nous, ô Père,  
 A nos portes gronde le mal,  
 Il voudrait souiller cette terre  
 Et ce peuple, ton fier vassal !

Mais toujours, nous serons fidèles  
 A Saint-Pôl, à tous nos patrons,  
 Et Dieu, sous l'ombre de leurs ailes,  
 Au ciel, mettra les Bas-Bretons !



## Prière à Saint Pol

Chantons, chantons avec les chœurs des Anges,  
 Pôl aujourd'hui triomphant dans les cieux !  
 Des Bas-Bretons accepte les louanges  
 Et vois les fils dignes de leurs aieux.

O Saint Patron, garde au peuple qui t'aime  
 Avec ses mœurs et ses clochers à jour  
 La foi du Christ, la foi de son baptême,  
 Toujours ! toujours ! toujours !

Dans la splendeur de ta blanche auréole,  
 Pour terrasser les modernes démons,  
 Pôl, apparais ; aux plis de ton étole  
 Comme autrefois, enchaîne les dragons.

Et dans l'abîme où l'on tourbillonne  
 Par ton pouvoir plonge Satan dompté.  
 L'ombre s'enfuit ; dans le Ciel qui rayonne  
 Renait le jour de paix, de liberté.

Pour honorer et baiser tes reliques,  
 Ton peuple en foule accourt de toutes parts ;  
 Les murs sacrés des vieilles basiliques  
 Ont retenti du chant des Léonards.

Partout la poie éclate en cette enceinte,  
 L'amour du Christ et des Saints d'autrefois.  
 Qu'il ta cité reste la cité sainte,  
 Chère à Jésus et soumise à ses lois.

Gardien sacré de la terre bretonne,  
Où la mer chante, où l'azur est si beau ;  
Au paradis la gloire t'environne,  
Et tu bénis le pasteur, le troupeau.

Notre faiblesse en ta puissance espère  
Et notre amour implore ta bonté ;  
Tous, nous voulons auprès de notre Père  
Chanter Jésus pendant l'éternité !



Imprimatur :

*Quimper, le 6 août 1927.*

P. JONCOUR,

v. g.